



# CHANSON

## CLOAREC PEMPOUL

Var eun ton superb.



**E**NTRE qæric Pempoul ha stang an Abaty  
Eus eur c'hloarec yaouanc o poursu e studi,  
Hac en deus composet eur zon d'e vestres coant,  
Evit e bassetans ha decor tud yaouanq.

Divar menez Crec'h-Noa, pa vezàn em repos,  
Me a ell hep fazia contempli eiz paros :  
Kerity hac Yvian, Perros ha Lanviniec,  
Plourez ha Plourivo, Plounez ha Plourennec.

Ouspen e contemplan ar pèvar elemant :  
Ar môr gant e lestri e costez al Levant,  
An douar er c'huz-eol, fructifiet gant poan,  
An ær a ziouc'h va fenn caëroc'h eguet an tân.

Ouspen e remerqàn costez tri dioces :  
Sant-Briec ha Treguer, ha Dol hep tromplerez,  
Extremite Bro-Sauz ha Rouantelez Franç,  
Hanvet scol ar vertuz, cabinet ar sianç.

Noblançou a blezanc , decoret a goajou ,  
Qestel , ha tiez-goard carguet eus a armou ,  
Enezennou fertil , antouret gant Neptun ,  
Hac havrou frequentet var o zro zo commun.

Ma ve libr va lagad , en deffe plijadur  
D'ar c'houlz n'pparis mui mab ena an natur ,  
O velet ac'hane mouvamant an êvou ,  
Sclêrijen ar steret hac ar planedennou.

Goechal , pa voan disqib d'Aristot ha Platon ,  
N'en devoa va speret nep satisfaction  
Nemet o vedita var levriou ar sianç ,  
Ouz o c'honsideri n'em boa qen pasetans.

Amzera vag pep tra , n'en deus mui a charmou ,  
Gouarner ar galon am dalc'h en e lassou :  
Eur pech zo en Pempoul zo re grén a ressort ,  
Am dalc'h da languissa en despet d'am oll effort.

Reculit oll adrén , rarenteou Crec'h-Noa ,  
Noc'h eus mui a bouvoar darei d'am c'halon joa ;  
Er guæric a Bempoul emâ va slijadur ,  
Eno ma va mestrez , eur guenet dreist-natur.

Calliop , Polymni , Tepsichor , Erato ,  
Urani , Melpomen , Euterpe ha Clio ,  
Ha c'houi ive , Thali , c'hoar leun eus a furnez ,  
C'houi a voar an doare , me invoq hoc'h adres.

Exaucit va feden , Jenitor Jupiter ,  
Quittaït an dezert hac antreit en qær ,  
C'houi a voar an doare, quittaït prompt ho plaç ,  
It da gaout va mestres, grit dîn antren e graç.

Secondit Cupidon da essât e gounit ,  
Ouz e rebellion implich da oll gredit :  
Gra dezi va c'haret qement ha m'e c'haràn ,  
Pe laq-hi da zêvi guenén er memes tân.

Poursuiv anei erfin , lavar dei , Immortel ,  
E deus e Kerity eur servicher fidel ;  
Repesantit dezi e zòn prest da vervel ,  
Mar qendalc'h da veza em andret qer cruel.

Mercur, ambassader, tad ar sperejou mad ,  
Messajer eloqant , cass dezi va mennat ;  
Digor da ziou esqel ha nij prompt dre an ær ,  
Hep tenna da balan , disqen ebars en qær.

Abord-hi em reqet, gra dezi complimant ,  
Sezis dre rêsoniou ha dre gomzou charmant ,  
Ha tenn eur cedulen qent retorn var da c'bis ,  
Sinet em avantach gant an dorn am languis.

Mes mar chomfe bepret en e ompinion ,  
Digas dîn Lachesis , Attropos ha Cloton ;  
Digas memes ar Maro , armet a peb gallout ;  
Dre ar maro didruez da rei fin d'am hirvoud.

Erfin , bet diganti eul lincel griet mad ,  
Eun archet hac eur bez evit fin va laqat ;  
Ha ma car va buez , e devo plijadur .  
Da viana d'am maro , o rêi din sepultur .

Beza e deus pouvoar da gommand d'ar marc ,  
Ha me demeus va bez a zavo p'am galvo :  
Me zavo ac'hane , ressuscitet gant gloar ,  
Evit e admira evel eun eil Lazar .

Biscoas an Ameriq , daouest d'e oll bompad ,  
N'e deus güelet qer caër , qen deread ,  
Na biscoas an Asi , gant oll fertilite ,  
N'e devezus produet hevelep rarente .

Disqen en qær Pempoul , qerz dre ru an Ilis ,  
Ha tach da flechissa an objet am languis ;  
Ha na espern netra er seurt occasion ,  
Evit gonit e speret ha rei joa d'am c'halon .

Impalaer puissant , Monarq victorius ,  
Mab ena an êvou , fidelite Venus ,  
Laqa en he c'halon ar bir lem am blessas ,  
Ma teuy en bêr amzer evit va renta yac'h .

Me stago ouz va brec'h divin Appelles ,  
Al liou caer em boutiq hac em penn an adres  
Da denna e fortret da gasse d'an Occidant ,  
Da gass ebars er Sud , en Nord hac el Levant .

Eurmennatarànc'hoasqentdisqenerMenez;  
Me a garre plijout da galon va mestrez :  
Rouanez ar Muset, ho pet attantion  
Qent ma zìn da repos canomp dezi ar zon.

FIN.

---

## CHANSON NEVEZ

*Var sujet eun Ozac'h zo bet fouettet gant e Vreg.*

*Var ton : Bretonet d'en em divertissa.*

---

**C**'HOANT am bez d'ho laqat da c'hoarzin,  
Pa glêfot petra zo c'hoarvezet  
Gant an Ozac'h demeus ar vrô-mâ, daïc tala,  
Gant eun Ozac'h demeus ar vrô-mâ  
A zo bet fouettet gant e vreg.

An den-mâ a ranqe lusqellat,  
Ha mont ive bemdez d'ar ster,  
Ha ma na blije qet an dillat, daïc tala,  
En-divije bazadou leiz e ler.

Qê pront da lusqellat ar buguel,  
Sqüis ê va fenn oc'h e glêvet,  
Pe ma qemeràn eur geuneuden, daïc tala,  
Va mignon, me raï did monet.

Va fried, arabat e fachac'h,  
Monet a ràn da lusqellat :  
Cousqit aze, va mabig bian, daïc tala,  
Mar fach ho mam ne moun qet net.

Yan, ret e dec'h sevel ar buguel,  
E douma hac e valluri,  
Oza ar yot, qempen an ty-màn, daïc tala,  
Güelc'hi podou ha scudelli.

Me ya da dy va amazeguez  
Da goseal eun nebeut c'hoas;  
Preparit lein aben ma teuin, daïc tala,  
P'autramant ho po fest ar vas.

Qemeret ho plijadur, va fried,  
Me yêlo doc'h avertissa;  
Caout a refot pep tra preparet, daïc tala,  
Aben ma teufot da leïna.

Va fried, pa vo ho commodite,  
Prest ê lein, trempet ar zouben,  
Me a ya va-unan da zervicha, daïc tala,  
Da laqat güin en ho qüeren.

Yan, qeit ha ma vezin e leïna,  
Laqit buan dour var an tân,  
Da voelc'hi plajou ha scudelli, daïc tala,  
Ha podes va mabig bian.

Yan, amâ e zeus chomet souben,  
Debrit hervez hoc'h appetit,  
Hac esqern a zo mad da grignat, daïc tala,  
Mes na douchit qet ous ar c'hiq.

Va friet, me a effe eur banne,  
Eur zec'het bras a meus bremâ.  
Qemer da veren eta, mevier, daïc tala,  
Te a c'heus c'hoant eus bep tra.

Mont a ra da rinça e veren,  
Eur maleur gantàn zo c'hoarvezet :  
Gant ar bres en devoa d'e voalc'hi, daïc tala,  
Etre e zaouarn e torret.

Chom a eure a grenn estonet ;  
Ma lavaras en eur grena :  
Eur maleur zo ganén erruet, daïc tala,  
Torret ê va güeren, emezâ.

Jarnicoton, eme Jaqetta,  
Bremâ ni a zanço ar bal :  
Tennit ho braguezen, va mignon, daïc tala,  
M'ho p'o an disciplin ractal.

Taflica, flaca a bep costez,  
Me ho tisco da derri güer.  
Na netra demeus an tieguez, daïc tala,  
C'houi oar ervad an traou zo qer.

Va fried, ho pet ouzin truez,  
C'houi laqai ar goad da redeg;  
Me effe qent güin gant va boutes, daic tala,  
Eguet terri güeren ebet.

Güisqit ho praguezen, va mignon,  
Hac it da rinça ar pôd-se :  
Divoallit na dorfac'h davantach, daic tala,  
Netra ebet en ho pue.

Qenta tra a dori en ti-màn,  
Me a grogo ouz bleo da ben,  
Ha memes tra ouz da ziouscouarn, daic tala,  
Qen a zeuint qeit ha re eun azen.

Diouzìn-m'eta, goaset yaouanq,  
Tachit da blijout d'ho craguez :  
Divoallit na viot re vechant, daic tala,  
Pe viot fouettet coulz ha me.



FIN.